

**Charlez Rolland** (Lanneanou 1862 – Gwerleskin 1940)

## **Klemmgan Charl Cornic Duchên, laret dirag e skeud e Montroulez en daouzeg a viz Gwengolo 1897**

Charl Cornic Duchên : **Notenn gand an oberour** : Né à Morlaix le 5 septembte 1731.  
Décédé en la même ville le 13 septembre 1809.  
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Charlez Corniv Duchên, martolod kaloneg,  
Unan a wella mab 'n-eus bet or bro roheg,  
Setu deut an deiz a hloar hag a enor  
A ra da genvroiz hirie en da vemor !  
Paotred vad Breiz-Izel n'ankounac'hafont biken  
Ar re 'deus divennet or bro war an dachenn :  
Abred pe ziwevad e riskwelfont d'ar bed  
Ar re 'zo evel dout gouestl da veza meulet.  
Ar re aneze 'zo memez en Pariz o veva,  
D'ober dit lealded a zo er penn kenta :  
Int eo o-deus roet d'ar gêr-mañ da skeudenn,  
A zalho deuz ouizn ar zoñj da virviken.  
On mennad d'an dud-se a enor evel-se  
O mamm-vro, dre vraster ha nerz he bugale :  
Dirag da skeudenn-ze, Cornic, hag ez ano,  
Ni a zrigureka a-greiz or halon.

Pell 'zo gleet deom ha da gêr Montroulez  
Sevel dit ar skeudenn-mañ en kichenn da vên-bez ;  
Er gêr 'leh 'oas ganet, a-grenn tostig d'ar mor,  
War an hini<sup>1</sup> 'peus douget armou Frañs gand enor.

Daoust piou mui egedout 'n-eus talvezet kaved  
Eur skeudenn-ze kaerroh digand ra Vretoned ?  
Den all 'barz er brezel 'n-eus bet diskwelet sklêr  
Mui eged evidout ar merk deuz e vraster !  
Piou eo muih faëuz biskoaz 'raog ar maro !  
'Med Cambronne, pell goude, war dachenn Waterloo ?  
Peleh 'mañ 'n den a vor er bed-mañ, med Jean Bart,  
A gement a vefe bet dit-te treh na par ?  
Ha n'e-peus-te ket bet en da amzer genta  
Eur vuhez trubuillet evel an dud vrasa ?  
Mab d'eur paramantour , deut deuz ar bobl izel,  
'Poa ranket gouren stard 'benn 'n eur gaoud ken uhel.  
War listri skañv da dad d'an oad a naonteg vloa'  
En-kreiz da breizerien 'oa gwall derrupl dija.  
Greet e-poa 'benn neuze warne unneg kampagn

---

<sup>1</sup> an hini ; b'hini, er skrid orin.

En Amerik, Bro-Zaoz, Portugal hag er Spagn,  
Ha dre leh 'tremenes e spontes ar Zaozon,  
War ar re<sup>2</sup> e sailles ker gwaz hag eul leon !  
Ken a grenent hepken o kleved da ano,  
'Oa dija ken brudet en pevar horn ar vro.

Etre Bro-Zaoz ha Frañs, pa darz ar brezel ru'  
War listri ar Roue te 'oa lampet diohtu,  
Leun a dan ; a zever, ha prest d'en em ganna  
Ha da skuilla da wad 'vid divenn ar vro-ma' !

Ma ne oas ket gouarner war listri braz ar Frañs  
Ne oas ket evel kalz deut deuz gwad an Noblañs :  
D'ar houlz-se a re-mañ a entente beza  
Dre oll hag en peb leh er hargou uhella ;  
Eur preizer evel dout, d'an aotrounez groñs-se,  
N'helle mond re uhel anez noazoud deze ;  
N'eo memez gand poan, dre m'oas ker kaloneg,  
'Oas anvet despet deze, eun deiz gand Lois pemzeg  
Sturierig uhella war eun tamm lestrig kêz  
Dezo taolet er blotou<sup>3</sup> evel eur goz votez ( !).  
Gand an hini<sup>4</sup> te 'poa greet taoliou kaer koiulskoude  
Ma oas greet Lutanant prestig gand ar Roue.

Nag a bed lestr-brezel n'az-peus ket kemeret !  
Gand ar reou vihan 'veze ennout fiziet ;  
'Kreiz ar poultr, ar maged, trouz an tennou kanon,  
'Pad ar brezel "seiz vloaz" meum bet deuz ar Zaozon.

Eur wech, gand daou-hant den, en noz, en-kreiz an tan,  
En-tal enezenn Eusa, gand da lestrig bihan,  
A-eneb tri lestr braz, warne eur bern Saozon,  
Da dud hanter lazet, kouezet da bavillon,  
An oll' deus da bedi da zond d'en em renta,  
Te, 'vel eul leon euzuz a chom bepred 'n e za' !  
Ha gand da vouez nerzuz, dispont rag ar maro,  
'Poa adlakaet da dud da zailha d'an armo',  
Gand kemend a gounnar, ma kreñjont dir ha tan  
En genou ar Zaozon 'rankas 'n em denn buan !

Goude eun taol ken stard 'oas uhellaet arre<sup>5</sup>,  
Hag er bloavez war-lerh war gorre *Ar Prothée*,  
'Poa kemeret unan a wella listri saoz,  
Evitañ da zougen eur bern kanoliou groz.  
Neuze, doug 'n o halon, seiz den nobl ofiser,  
Noazuz deuz da halloud, da hloar ha da vraster  
Deue da hegased da eur hann penn-ouz-penn

---

<sup>2</sup> ar re : bere, er skrid orin.

<sup>3</sup> taolet er blotou : **notenn gand an oberour** : L'Agathe.

<sup>4</sup> 'p'hini, er skrid orin.

<sup>5</sup> arre : adarre.

Leh e-poa o zrehet o-zeiz war an dachenn !  
E-leh dond d'az tougen, d'az meuli, d'az krataad,  
Ministr ar mor, goude, ne ree 'med da hoapaad  
Ma oas skuizet kement deuz e zislealded,  
M'az-poa kuitaet ar mor, ar brezel echuet.

War enezenn Sant-Jord, en-kichenn kêr Vourdel,  
E oas en em dennet, haroz ker Breiz-Izel !  
Med eno en diskuiz 'poa prestig diskwelet,  
Koulz a-barz er brezel 'oa gwad 'n e skoazied :  
Pa oa bet dirollet an dour dreist ar *Garonne*  
Ar vro a-bez war neuz, 'glevjout 'med da galon !  
C'hweh-kant den en argoll 'poa eno saveteet  
Ha 'pad tregont devez diwar da goust, maget.

Ar Roue dre lizer a veskas dit e stad :  
A Vourdel ar "vourhizien" a deuas d'az krataad ;  
Ma oas maher Sant-Loiz a-benn tri bloaz goude,  
Eur merk an uhella en or bro d'ar hoiulz-se.

Pa zigor ar brezel gand ar Zaoz a-neve'  
Te houlennas diohtu mond d'an tan adarre !  
Ha 'pad an dizurz vraz en Bourdel c'hoaz te 'oa  
Koronel jeneral war gwardou ar vro-mañ'.  
Med pa deu ar spont vraz, lesanvet an "Terreur",  
'Oas distroet kerkent, amañ 'tal da vreudeur ;  
En traoñ ster Montroulez, leh 'oa en em ouestlet  
Er rest deuz da vuhez d'ober vad d'az konsorted ;  
Eur skol vartoloded e-poa savet buan,  
'N-eo greet eur vad iskiz en-touez ar bobl vihan :  
C'hoat e-poa da ober, 'veldout, tud a armou  
Da zivenn ar vro-mañ goude vijes maro !

Bete barz er maro 'out bet eur skwer dispar  
A vraster, a enor ! ma oe war an douar :  
Pa glevis 'oa 'n em rentet el lestr Frañs d'ar Zaozon,  
Prizonier heb emgann 'oa rannet da galon ;  
Da her, 'vel hini Breiz, oa "*Trehi pe vervel*".  
Ha 'vidout maro-mik, 'vel gand eun tenn kanon,  
Gand ar vez o weled Frañsizien ken poeltron !

Da ano, Charl Cornic, 'zo bet pell ankouezet,  
An istor bet garo e-barz en da andred ;  
Med deut eo an devez ma ranko disklêria  
Hag anzav da halloud dirag fas ar bed-mañ !  
Hirie ez out digollet dezu kement a ankouezet,  
Er Menb<sup>6</sup> ag ar gouel-mañ, 'reer dit en Montroulez !  
Da zremm gaer er broñs-mañ, a chomo stag heb mar,  
Evel skwer d'ar re veo a vo war an douar !

---

<sup>6</sup> Menb : Monumant.

Da viken 'vi distro war-zu an Hanternoz,  
'N eun dispah ken terrupl ! ma kerno c'hoaz Bro-Zaoz !  
Da vreh kreñv astennet ! da zellou dreist ar mor !  
War-hed, prest da ziwall ar Frañs, Breiz hag Arvor !

'Po savet eur Panthéon da dud vrudet on bro  
Warnañ ivez 'vezo garanet da ano :  
Eno e lugern en-kichenn breudeur all  
O-deveus evel dout divennet Frañs gwechall,  
O stourm, o vrezeli war war zouar ha war zour  
'Eneb ar Zaoz treitour, he gwas a enebour.  
Laket 'vi en-kichenn an terrupl Duguesclin,  
An tri haroz Surcouff, Bisson ha Tremintin,  
Duguay-Trouin, Bomanoar, Olier-ar-C'hlison,  
Ar re<sup>7</sup> 'deus evel dout bet dornet ar Zaozon !

A-dreuz an amzeriou, bete 'mo fin d'ar Bed  
Da ano er vro-mañ 'vo douget ha meulet,  
Gand paotred Breiz ar re<sup>8</sup> a gano, a-bouez-penn,  
« Gloar ! enor ! meuleudi ! ! da Gornic da viken ! ! ! »

Ch. ROLLAND

Kinniget d'an Itron ALEXANDR, en Chuchuniou a Blouyann,  
ha d'he herent deut a ouenn-dud Cornic.

*Gwerleskin, 10 Gwengolo 1897.*

---

<sup>7</sup> Ar re : pere, er skrid orin.

<sup>8</sup> ar re : pere, er skrid orin.